

CANTIC SPIRITUEL

EN ENOR D'AN ITRON SANTEZ-ANNA AR PALUD

Eur plaç santel a zo en escopty Querne e parroux Plounévez-Porzay, a dost d'ar mor

Var ton : Santez-Mari, Mam Doue

Me ho ped, tad Eternel, crouer ar firmamant,
Roit d'am speret sclerijen, Doue oll-buissant,
Da disoloi eun tensor a zo e Breiz-Izel,
E touez ar Vretonet leun a graçou santel.

Guerc'hez gloriis Vari, me o ped, ma sicouret,
C'hui Itron Santes-Anna zo enni enoret,
Evit discleria d'an oll ho craçou excellant,
Hac ar miraclou a ret, rozen ar firmaman.

En escopti a Guerne e bordic ar mor glas,
E parres plounevez-Porzay euz eur zourcen a chraç,
Eur plaç leun a viraclou, mar deus var an douar,
Batisset en eur blenen dirac an eol par bar.

Cals eus a plaçou santel a veler batisset,
D'an Itron Santes-Anna, e pep lec'h enoret,
Balamour ma ra bemde nomb bras a viraclou,
Hac er mor hac en douar e cleo hon pedennou.

Mes hep choqui, nep chapel zo dezi batisset,
E deus eur plaç santel er Palud biniguet,
E leca'h ma zeo enoret guir vam goz hor Zalver,
Gant an oll belerinet demeuz a bep quartier,

Ar plaç man zo frequentet gant guir devotion,
Gant ar gristenien fidel demeus a peb canton,
Abalamour ma e deus roet cals a soulajaman,
Ha ma obtent ar yec'het da gals tud languissant.

Pobl an eskopti Querne, c'hui a zo eurus,
Da gaout en ho touez guir vam-goz da Jesus :
Deut oll da c'houlen outi ar c'hraçou necesser,
A galon vad d'e fedin d'ho tivoal dioc'h danjer.

O Itron Santes-Anna ! brema ma sicouret,
Pedit ho merc'h ar Verc'hez da rei din ar speret,
Ma c'hallin dre ho sicour comz euz ho miraclo,
Hac eus ann oll joausdet a laquet en hon bro.

C'hui oc'h eus plantet ar ros elec'h ma oa ar spern,
Ha gret hent ar baradoz eus ann hent ann ifern ;
C'hui oc'h eus bet distroet pec'herien caledet,
Hac o laquet da vezan tud santel ha parfet.

Me ho suppli, tud devot, chelaouet a vrema,
Coms demeus ar miraclou a ra Santes-Anna,
Ma teufot oll ha galon d'ar Palud d'e guelet,
Ha ne goll quet go poan dre graç Salver ar bed.

Eus ar parres Plougastel voa eur bælec yaouanc,
Privet eus ar guelet, en devoa nec'hamant,
E spaç eus a dri mis, siouas ! en eur goal stat,
Hele lavaret oferen gant an drouc daoulagat.

Alliet oue gant e dud ractal d'en em vouestla,
E chapel ar Palud d'hor mam Santes-Anna ;
En deves m'harruas en deus oferennet :
Meulet ra vezò Jesus hac he Vam biniguet !

Eus a guichen Pont-Abat eur certen plac'hyouanc,
Bet tri blos gant an derchen, e devoa cals a nec'hamant
Eun ave e deux gret e chapel ar Palud,
Bet e deus ar yec'het a zirac calsa dud.

Eus ar guer Quemper eur potric daouze vloa,
E spaç a dri devez bet gant an divoada,
E vam a zisparisas offrang a galon vad,
Da Santes-Anna ar Palud. ractal e cess ar goad.

Ur batiman carguet, var e guenta beach,
Gant an tourman attaquet, o tremen Bec-ar-Ras,
Peder heur varnuguent entre an daou mour,
Perrissa a sonjent hep gallout en em sicour.

Ar c'habiten, den devot, hac e vartolodet,
Da Santes-Anna ar Palud o deus en em voestlet,
Dre ar graç a Zoue hac e vam goz Anna,
Rentet e voan en Brest, disanger ha gant joa,

Evit e drugarecat, a vœu o deveus gret,
Dierc'hen er Palud ha en corf o rochet,
Gant bep a piled-coar evit rei testeni,
Eus ho miracl quer caer, Mam ar Verc'hes Mari.

Eun den yaouanq, a ugrent vloa oajet,
Pehini gant ar vrec'h a gollas ar guellet
A ra cals a nec'hamant ha d'he vam ha d'he dad,
Guelet eur sort den yaouanq o coll e zaoulagat.

Ur personnach charitabl o allas timat.
De voella er Palud da Vam ar Verc'hes sacr ;
Raectal ma o deus laquet oferen evitat,
E recevas ar guelet dre c'hraç Santes-Anna.

En escopti a Leon e parres Ploudaniel,
E deus gret Santes-Anna ive eur miracl caér,
En endroet eur plac'h yaouanq a zo bet attaquet,
Memes e quichon e dor gant eur c'hi arrajet.

Ar plac'h-man pa er goelas a gommanç da grial :
O Santes-Anna Palud ! hac a invoquas raectal,
Dre bermision Doue, ar c'hi lampas timat,
Gant errach gant eur men, en abimas a voad.

Just eo c'hoas en hoc'h enor parlant eus ar graçou,
Oc'h eus obtenet d'ar bobl epad e klenvejou.
Ann dud oll en ho tier, siouas ! var ar guele,
Antier hospitaliou gant ar c'hlevet lou-se.

A reo deus bet bonheur d'en em recommandi,
Deoc'h en o affliction Mam ar Verc'hez Vari,
A veler o tont bemdez d'ho chapel benniguet,
O trugarecat Doue da veza bet ar iec'het.

Soudardet, martolodet ne aller quet nombri,
An niver a ve guelet bemdez var dro ho ti,
O trugarecat Doue d'ho beza preservet,
En creis ann oli combajou, d'an danger exposet.

Cals zo c'hoas a viraclou pere ne hanvan quet,
E deus gret Santez-Anna ar Palud benniguet,
En andret tud afflijet demeus a pep cartier,
Cet soulajet er Palud dre graç Mam hor Zalver.

Tud eam, tud dall a bouzer è deveus soulajet,
O reï ar c'hle vont, ar guelet hac an nerz da guerzet,
Cals bugale languissant o deus sanctet e c'hraç
An oll a receo yec'het enni bian ha bras.

Ha bagou ha gobiry e deveus preservet,
Ha tud coueet er mor, pa zint dezi en em voestlet,
O deveus bed recouret o buez disanjer.
Ere graç Santes-Anna, guir vam-goz hor Salver.

Pobl eus a Douarnenez, me ho ped, ne vanquit quet,
Pa en em geuffot en danjer, troët pront ho speret.
Oc'h Santes-Anna ar Palud pede a galon vad,
Da zonei d'ho preservi, guir Vam a Verc'hes sacr.

Quement en emgav nec'het gant an affliction,
En em voestlet er Palud gant guir devotion,
Ha mea ell assuri gant guir fidelite,
E teuffet joaüs d'ar guær, en eur veuli Doue.

E pevar c'horn ar c'hartier approuvet gant an dud,
A c'hraçou qu'en necesser, a recever er Palud.
E Brest hac e Landerne, e Faou hac e Quemper,
E santer ar garantez e vam goz hor Zalver.

Conquerne, Ene-Tudy, Penmarc'h ha Pont-Abat,
E Pont-Croas, e Goaiens e quever testou mat,
En o afflictionou o deus-y invoquet,
An Itron-Santes Anna o deus-y éxauçet

Bep meurs epad mis eost ez eus induljançou.
E Santes-Anna ar Palud pardon d'hor pec'hejou,
A nep a rai a galon eur govesion vat.
A recevo corf hor Salver gant eur feiz admirabl.

Nep en deus devotion da zont d'ar pardon bras,
D'ar zul diveza a vis eost ema ar sourcen a c'hraç :
An deiz-ze e deus choaset hor mam Santes-Anna,
Evit beza enoret gant oll dud ar vro-ma.

O coves o communia da zevez ar pardon,
E Santes-Anna ar Palud, gant guir devotion,
Eus induljanç plenier gant ar Pab accordet,
D'an oll gristenien fidel a zeu d'e darempret.

Me o suppli, christenien, douguet a galond vad,
Eur chapelet en enor da Vam ar Verc'hes sacr :
Deut de lavaret a galon hep meurs, vanquit quet,
En enor Santes-Anna, e viot recompanset.

Deut muia ma vo possabl d'ar Palud d'e guelet,
Da visita e chapelet he feunteun biniguet,
Ha me assur, goulennet ar graçou a guerret,
Gant eur galon preparet, certen a recefet.

O Itron Santes-Anna, hor Mam hac hon Itron,
Hon recevet holl breman dindau ho protection,
Pedit hor Salver Jesus d'hor sicour nos ha de,
Hac en heur eus ar maro da receo hon ene.

FIN.

TORFET GUINGAMP

GUERZ VOAR VARO KRI LOUIZA PERRET OAJET A EIZ VLOAS

*Commetet gant Pierre Omnes dan unan varnuguent a vis guenver
er blavez milnaohant un.*

1^e Couplet.

Drindet kaér adorabl roit din sklairijen
Vit ma hallin disclairit dirag ar gristenien
Ar hrim a zo cometet en non toues bretonet
Ebars er guer a vengamp rue tortrieux hanvet

2^e Couplet.

Ma roît din assistans hervez ma ol souhet
Me rimo e prezonnec braima dar vretonet
Oll detaillou ar hrim cometet barz er vro
Péré laka da frima goad kemen e hlevo

3^e Couplet.

Ebarz en toues an anevalet en toues ar loenet gouez
A zo brema ma Doue muoh a garantez
Vit so touez ar vugalé barz en amzer brésant
Goudai beza en o ti recevet ar vadiant

4^e Couplet.

Pebeus malheur eo dan den aman voar an douar
Deut ebars en ne vuez dober skouarn vouzar
Deus gourhéménou Doué evit dont da glevet
Ar vouez tromplus a traitour deus an droug speret

5^e Couplet.

Me o ped a vir galon brema oll kristennien
Deut da glevet recita braima sur pen da ben
Ar hrim a zo cometet gant eur hivijer yoanc
E ano Pierre Omnes o etrom barz en Guingamp

6^e Couplet.

Ebarz er bloa mil-naahan un e neuz bet cometet
Dan unan varnuguent a vis guenver evit reï da entet
A deus renket Louisa Perret soufr eur maro kri
Entre doarn ar barbar den kruel ac impi

7^e Couplet.

Da hoch heur dabardaé ar plahit zo bet et
Dober e homision evel ma voa dei ordrenet
Ac allas e zud siouas ne jonjent ket
E vije ar malheur na ganti horvezet

8^e Couplet.

O Doue va Doue goa! heur predestinet
Hep dale ar muntrer voa ganti nem gavet
Ac a roas dezi bonboniou en eur distrei dar ger
Ac e hassas gantan dar prad vit hober e malheur

9^e Couplet.

Hep ar barbar nac a neus e mouquet
O dorn kriminal den infam a miliguet
Neuzai an inosant dan douar zo kouet
Digairi a ra a nezi aca neus e violet

10^e Couplet.

O monstr bas deus an ifen pelzo dija collet
Digout a ray didé respont deus da dorfet
Daoust pegen yoanc ont e vé zur punisset
Deus an torfet grevus e teuveus cometet

11^e Couplet.

Guelet braima kristenien petra e neus sonjet
E zeuler barz er voas goudai ma neusi merzerut
A neuzai e heas dar guer ac e heas en ne velai
Ac e nem lakeas da gousket da hortoz an dé

12^e Couplet.

Guelomp braima kristenien glahar tad a mam dener
Guelet avancet an nos o merh nairue ket er ger.
Gant glahar en ho halon partout deu e hasket
A digant kement a velenté deus bed goulenet

13^e Couplet.

Da zégueur deus an nos pa deus hi ket cavet
Dober o declaration dar police neuzai è bet aid
A Kerkent e tuas ganté Menou a Contellec
Nac evit klasc ar plahit pehini voa dianket

14^e Couplet.

Partout dre ar vali a Tortrieux e deveus e hasket
Ac ar voustaillet pétrol nac o deuveus cavet
A neuzai o deuveus sonjet na lamet e barz er prad
Er leh ma deus cavet corf ar buguel misérabl

45^e Couplet.

Piou a gomprenfai an anken an drue a savas
Pa voa cavet ar plahit voar e fen barz er voas
Eur plahit a eis vla rentet en neur seurt stad
Mouget ebars er fanc en ne boutou ar goad

46^e Couplet.

Ar gristenien fidel o deveus e havet
O halon en ho hreiz a zo chomet mantret
Mantret voa o halon a karguet an anken,
Ken a garchen biquen james vijen bed me hichen

17^e Couplet.

Mes Doue kristenien netra neller kuzet
A dre e vourir Brovidanç neuz'ive permetet
E vije er bed ma ar hrim dizoloet
Ac aben daou devez goudai e neus bed ansavet

18^e Couplet.

Neuzai Pierre Omnes voa gant ar jandarmet garottet
A conduit dar prison pa nevoa meritet
Ac ar bobl demeus a vengamp vele ma deus clevet
Ar maro evitan ho deveus goulenet

19^e Couplet.

Dar Merher Louisa Perret a zo bed enterret
Gant eur solanite vras an interramant zo gret
Na gent ar bobl deus a vengamp e voa azistet
Na comprenit ar glahar voa eno bretonet

20^e Couplet.

Drama zo calonat vit an tad ac ar vam
Draman zo evite eur voalen a dourmant
Me ho ped tad a mam tachet de nem gonsolet
O Merh a zo en envon gant an ele kurunet

21^e Couplet.

O houi mamou tener deut oll dar bartaji
Gant ar vreg kristen ma e merh melanconi
Deut da voela ganti da guemer eur laden
Da bartaji entrezoh e glahar e anken

22^e Couplet.

Kemerit hoas couraj tad a mam dezolet
Cessit da zeplori a e nem gonsolet
Dre e merzerenti o Merh zo kurunet
Gant ar pent bac an ele en pales an drindet

23^e Couplet.

Louisa Perret zo brema en toues ar verzerien
Laquet dei gant Doue voar e fen ar haera kurunen
E ma braiman gant an ele en enr deu ho kortos
Gras deoh a dopm oll der guelet er Barados.

AMEN.

CANTIC A VEULEUDI D'AN ITRON SANTES-ANNA

Enoret e Parres Plonniévez-Porsay E chapel ar Palud, a dost d'ar mor

VOAR EUN TON NEVEZ

Me hoc'h ador, ma Doue, eus a greis ma c'halon,
Hac a rent d'ho Majeste mil benediction,
Da veza ho enoret ha carguet a joa,
Argraou accordet d'hon Mam Santez-Anna.

O sourcen an oll graçou ha lenn a zantelez!
Recevet hon c'halonou, Mam leun a vadeles,
Petric bennac ma omp indign eus ho protection,
Suppliet o Mab divin da accordin deomp pardon.

Itron gant Doue caret, rosen mysterius,
A c'hanoc'h eo sortiet Mari, mam d'a Jesus.
An hini a oa choaset a bep eternite
Da garga a joauet an douar hac an Env,

C'hui eo ar guir patronez eus an dud eurejet,
Hac ar guir advocades d'an holl intanveset,
Tensor an oll vertusiou, exempl ar guerc'heset,
Hac eur vam leun a graçou da guement den ho ped.

Demeus a greis hon ene ha gant eur guir fisianç
Ec'h offrump d'ho carantez oll gouvernamant Fransé ;
Pidit Doue da accordin d'ar Fransijen guir gristen
Ar c'halimp dre ho sicour mon d'an Env d'he veuli.

O Itron Santez-Anna ! bezit advocadez
Evit an oll pec'herien deu d'ho pedin bemdez,
Vit ar pennou principalan zo ous hon difen.
Obtenet dezo ar c'halimp da souten al lezen.

Recevet, mam biniguet, ni ho ped a galon vad,
Dindan ho protection hon Tad santel ar Pad ;
Ivez ar gardinalet hac an oll esquibien.
Hac ann oll dud a illis da gresquis al lezen,
Sicouret, mam truezus, hon tud an armeou,
Astennet ho torn eur eus ha peuc'h ar c'hombarjou,
Chasset hon adversourien a bell demeus hor bro,
Ma vesimp fidel d'ho lezen tre betec ar maro.

Obtenet, me o suppli, o Mam carantezus !
D'ar rezo en agont eur maro eureus ;
Obtenet digan Doue, d'ar groaguez zo poaniet,
Badizant d'ar vugale, ha d'ar vam ar iec'het.

Hon tud hac hon oll madou a laqueomp oll gant joa.
Dindan ho protection, Itron Santez-Anna,
Pedit an Drundet santel da zont d'ho pardonne,
Ma c'halimp dre ho sicour mon d'an Env d'he veuli.

FIN.